

# LOUARINIG

Niverenn 2



Ar vikinged



Klask an aour



Kontadenn Nordahl

# Ar glaskerien aour

**Kuzhet e koad  
kehederel ar  
Gabon, ur  
gêriadennig  
klaskerien aour  
hag a vev diouzh  
labour ar  
barazhiou dindan  
red an heol.**



6 eur 30, emañ an heol o sevel. Emaon gant ma c'hein c'hoazh. A dra sur ez eo abalamour d'ar c'hwec'h eurvezh am boa tremenet en ur 4x4 dec'h evit dont betek amañ. Er gêriadennig-se, kollet e-kreiz ar c'hoad kehederel, n'eus na tredan, na dour-red hag, evel-just n'eus pellgomzer ebet. N'eus nemet klaskerien aour hag evit ar wech kentañ, un den gwenn, me.

En em aozañ a ra ma mignoned nevez hag ez eomp kuit trema ur frankizenn vras a red enni ur wazh hag a gas traezh aourek gantañ.

Krog eo al labour ! E-pad ma prient ar merc'hed ar benvegoù a dalvezo da naetaat an traezh e tiskenn ar baotred en toullou leun a zour hag e krogont da denañ an traezh aourek. Hemañ eo penn-kentañ ul labour skuizhus ha lakaet da vezañ poanius gant an heol zo krog da dommañ an aer.



Eun eo an doare d'ober. Dourañ a ra Hortense an traezh gant ur sailh ha Véronique a vesk ar meskaj gant ur bal. Kouezhañ a ra an traezh dre an toullou lec'hiet e deun ar fust ha taolet e vez ar vein a chom a-gostez. E-pad pemp eurvezh emañ an div vignonez o vont da labourat dindan an heol, gant ar spi e vo stank an aour en traezh.

A-wechoù e tiskarg Véronique dour war-eeun war an traezh evit tennañ un tamm anezho ha bec'h d'al labour adarre !



Ar bal implijet gant Véronique a vez graet « pal-treiñ » anezhi. Froterezh ar vein hag an traezh a uz kement anezhi ma vez ret he cheñch bep pevar miz.



Pelloc'h, en ul lec'h all, ez eo prest ar reizhoù labour. Emañ Hortense ha Véronique o paouez staliañ al « longuetombe », un doare tobogan gant ur fust toulet a-us dezhañ. Eno e tispartio an div vaouez ar vein diouzh an traezh evit mirout hemañ diwezhañ hepken.

N'eo nemet e diwezh an devezh ma vez graet war-dro an traezh chomet war al « longuetombe ». Tennet e vez an traezh kuit o tiskenn dour en ur veskañ gant an dorn. Tamm-ha-tamm ez a kuit an traezh, kouarz anezhañ, ha ne chom nemet poultr du zo pounneroc'h. Pounneroc'h eo abalamour ma ya metalioù disheñvel d'ober anezhañ, houarn dreist-holl. Met e-kreiz ar poultr-se ez eo krog pailhouroù aour da skediñ.



A-benn neuze e tastum Gaetan ar meskaj-se en ur varazh. Gant evezh bras ha mestroni e krog da zourañ an traezh du en ur dreiñ ar varazhad. Nebeut-ha-nebeut ez a kuit ar poultr houarnek hag e teu ar pailhouroù aour war wel e deun ar varazhad.



Gaetan a laka pervezh-bras ar pailhouroù a zastum en ur voestig. Echu eo an devezh labour e-kichen ar wazh. Mont a ra an holl d'ar gêriadenn en-dro. Aet eo an heol hgozik diwar wel hag e don ar c'hoad e krog ar c'hentañ marmouzien da leuskel kriadennoù.



Diouzh an abardaez ez echuer ar walc'hadenn er gêriadenn. Lakaet e vez ar pailhouroù en ur voest-mir a lezer a-us glaou-bev un tan. Dre berzh an tommder e peg an eil re ouzh ar re all e stumm greunennoù aour zo aes da zispartiañ diouzh an traezh.



Ar bouezadenn-se a vez graet ouzh skleur ar c'hleuzeurioù dre eoul ha dindan selloù ar glaskerien a c'hortoz da c'houzout pet gramm o deus kavet e-pad an devezh.

War-lerc'h e tremenint an abardaez-noz en-dro d'an tan o kontañ o avanturioù hag o huñvreal dizoleiñ ur c'hreunenn aour vras. A-benn ar fin ez int da gousket rak antronoz e vo ret labourat en-dro.



Deut eo mare ar bouezadenn a-benn ar fin. Amañ n'eus ket anv a bouezerez elektronek, nag a bouezioù zoken. Dalc'het e vez ar bouezerez en dorn, ur bouezerez artizanel anezhi, evel ar peurrest. Div bladenn graet gant diazez ur voestig Coca en aluminiom ha istribilhet gant fiseleñoù ouzh ur vrañsell e prenn ebena.

Pouezañ a reer gant pezhioù moneiz hag alumetez. Un alumetezenn = 0,1 gramm. Ar pezhioù o dez pep a bouez disheñvel. Ur pezh pemp lur eus ar Gabon a bouez 3 gramm, unan 10 lur a bouez 4 gramm, ha kement zo...

